

115

42

BREURIEZ AR WIR GANERIEN



SAVET GANT AR JABADAO

a gan

son An Itroun war Vôr

*Diskan*

Ehamptira, tirediredi.  
Ehamptira, tiredireda.

1. Enn Oriant zo 'n em gavet  
Eur vatimant karget a ed.
2. Eur vatimant karget a ed.  
Deuit holl, merc'hed, hag hi gwelfet !
3. Merlead, pegement an ed ?  
Seiz lur, itroun, am euz kavet.
4. Seiz lur itroun, am euz kavet.  
Deuit war ar pount, hag e welfet !...
5. Ar c'habiten laraz neuze  
D'e vartoloded en deiz-ze :
6. Boutit d'ar frank, martoloded !  
Eur plac'hik koant am euz tapet.
7. Ar plac'h iaouank a lavaraz,  
D'ar c'habiten, pa e glevaz :
8. Klevit, me zo merc'h d'eur baron ;  
Na gouskan ket gant paotr godron
9. Me zo merc'h d'eun den a enor ;  
Na gouskan ket gant tud a vor.
10. Me zo merc'h d'eur c'huzulier ;  
Na gouskan ket gant eur preizer.

11. Ar c'habiten laraz neuze  
D'ar plac'h iaouank, pad he c'hleve.
12. Klevit, plac'hik, gourdrouzit ket,  
Kerkoulz ha c'hwi oc'h euz kavet.
13. Rak, me zo mab d'eur preizer mad,  
Hag en deuz c'hwech biz war bep troad !
14. Hag a bep amzer ma zud me  
O deuz bet talvezet d'ho re !
15. Martoloded ann Oriant  
A zo meurbed paotred friant.
16. Na pa vefec'h merc'h d'ar Roue,  
An noz man 'kouskfot ganin me.
17. An noz man 'kouskfot ganin me  
An noz a zeu gant egile...
18. Lakit 'n taboulin en tro kear :  
Kollet gant hi he zavancher.
19. Lakit 'n taboulin er c'hantoun :  
Eat e 'n dimezel da itroun.
20. Pemp kant mil skoed hi deveuz bet,  
Evit he c'hampagn tremenet.
21. Nag eur mab bleo melen frizet...  
Petra 'n deuz den da lavaret ?